

172

Recit circonstancié

Var sujet ar maleurion occasionet gant ar Gurunou, en
 Taule, en Brest, en Loc-Maria-Plabennec, en Pénran,
 en Ofemperle, en Scaer, hac en qichen Montroulez,
 vandro fin mis gerru, er bloa 1833.

(136)

Var ton : Demp-ni oll bremañ, va Breudeur.

Stron Varia beniquet,
 Ha c'houi, Jesus, Salver ar bed,
 Plijet m'oc'h insocin amañ,
 Rac hepdoc'h netra na ellañ.

An oll a voa digesperet
 Hac o devez ractal serret
 Gant eur soign bras o dorzoù
 Hac ivez o oll brênestou.

Ha c'houi ive, Speret divin,
 M'ho ped da rêi sclêrijen din
 Da ellout amañ disclêria
 Maleurion deus an horrupla.

An dud qez neuze a stoue
 Da implori sicour Doue :
 Eur dra horrupl e voa clêvet
 Ar griadennou a leusqet.

(138)

Bremañ, leun eus a goufianç,
 En madelez ar Broidanç,
 E zan da antren en matier :
 M'ho ped d'an zelaou, va breuder. (137)

Ar gounabrennou a fraillas,
 Hac ar gurunou a stracas ;
 Eur tij a gargas a vogued
 Hac a voa goal flêryus meurbeth.

Ar zeitec eus a vis queneur,
 Certen e voe bras ar maleur
 A êruas, sivoas neuze,
 Allas ! ebarr en boung Taule.

Demus eno eo diredet
 D'an tour, hac en devez teuzet
 An orjalen a zon an heur ;
 Mes, ô Doue ! pebes maleur !

Vandro eur peder-heur anten,
 E voa goal deval an amzer,
 Pa distarzas eul luheden
 A ras eur spontus sclêrijen.

Diouc'h-tu d'an traon e tîruillas,
 Hac er porched ec'h antreas,
 El lec'h ma tiscaras a blat
 Daou den a voa o labourat.

Qerqent neuze ar gurunou
 A sclaç spontus ar galonou ;
 Rac qer bras e voa fulor,
 Ma spouronnet oll a horror.

Unan zo chomet er porchet,
 Equile en ilis zo taulet,
 Tost da dreiol an Autrou cure,
 Spouronet oll demus a ze.

(139) An Autrou Lez voa d'ar c'houlz-se
Ebars en ilis a Daule,
Tostic da basinier an tour,
Decupet da veniga 'n dour.

Ar gurun a zo achappet
N'ouzor penos diouz ar porchet,
Hep lezel menq en e c'houde
Nemet an daou maleürus-se.

An Autrou Lure voe neuze
Trubillet oll gant an tram-ze,
Rac ne voa nemet hed daou bas
Demeus ar gurun pa goezas -

Sonjal a ras a dra certen
Penos e voa leusquet eun tenn
En diabars eus an ilis,
Hac a rê eun drous gen espis.

Mes, pa deu ennan e-unan,
E tinedas prest ha buan
Ebars er porchet da velet
Petra voa eno êruet.

(140) Ha pa velas ar maleürus
Bars en eur stat gen truezus,
E voe treantët e galon
Gant horrol ha compassion.

An himi a voa bet taulet
En ilis demeus ar porchet,
A voa var an douar pleguet
Vel eur c'hemener arzet.

Ha gant spouron varze an êe
E save e zouarn neuze,
En eur grial goal d'uezus:
« Misericord, ô va Jesus!...

» Va c'hôvessait, me ho ped,

» Autrou Lez, gent quitat ar bed;
» Rac, allas! me a vel bremâ
» Ne meus mui nemeur da veva.»

An Autrou Lez er c'housole,
Hac en assuri a glasqe;
Sicour a ras e gass buan
D'ar presbital ental an tann.

(141) Eno e voe examinnet
Ha geroent neuze assuret
E voa yac'h mat, hac e tleze
Neuze trugarecat Doue.

Ar paour qès a eure souden
A greiz e galon e beden,
D'er beza bet e gonservet,
Hac ebars en yec'hët lezet.

An Autrou Lez a zistroas
D'an ilis neuze a hast vras,
Da rêi sicour da equile,
Voa astennet var ar pave.

Ar c'hure dre inspiration
A c'halvas an autrou Person
A voa neuze eürsamant
Oc'h adori ar Sacramant.

Diredec a eure souden,
Allumet voe eur ciergen,
Hac absolvet ar maleürus
Ebars en templ eus a Jesus.

(142) Cavet e voe en eur stat trist
Eno hor breur en Jesus-Christ,
Hep tam anaoudequez ebet;
Eun d'uez a voa er gûelet.

Savet e voe eno neuze
Ouz en darc'hel en e goeze,

174

Ha ractal un hic a leucas,
Ar c'homzou-mâ a lavaras :

« Pardon, pardon, ô va Doue !
» Bezit truez ouz va ene . »
Ar peñ a zisqeuze certen
E verc a feiz a wir gristen .

P-ractal sicour a zo galvet,
Hac e vrez paour zo êruet ;
Mes pa velas he fried ger,
E c'wez diouc'h-tu en desesper .

An orzac'h ractal zo douguet
Beus an ilis bars er v'ered,
Hac eno an ead grén t'imat
A zeblant donet d'er quellat .

An autrou Person voa aris,
Ouz en douguen eus an ilis,
Ma vije prest casset d'e dy,
Erit gallout quell e zoigni . (143)

En effet, qerqent voe rentet,
Rac tostic eo ouz ar v'ered,
Mes deposet en e voele,
Né ro carji tam sin bue .

Ar Person a noias ractal
Ar maleirus-mây var e dal,
Hac e recev, tostic dezâ
E kuanaden diverza .

Tri vije 'r galon na vouelje
Ebars en ty nep a vije,
O clêvet ar c'hri, an anqen,
Gant ar c'heuz d'ar paour qez christen .

Ar Pastor dreist oll glac'haret,
O velet en d'evens collet
Unan eus e zanvad quella,

Na cess da hirvoud, da vouela .

Neuze e gorf voe bizitet
Da glasc eur blesseur benaqet ;
Unan heqen en em garas,
G'rêt gant ar pave, pa goezas . (144)

E gredi rêt asphixiet,
Ha prest ractal e voe casset
Da Vontroulez eur messajer
Da glasc eur medecin en q'eter .

An Autrou Dugen êruet,
En deveus an den dirisqet,
Hac ouz er zellet tro-vandro,
E tisclery crenn e voa maro .

Mes dit ober mad en pep poent,
Eo, diou beder heur varmugent
Var ar vascadon eno miret,
Aroc ma zeo bet entêret .

D'ar 'zul da nôs neuze eo bet
Rentet d'an douar beniquet :
Eur bobl immanç a assiste
Bars er ceremoni trist-se .

Lavaromp oll, a greiz calon,
Gant ar brassa devotion
Un De profundis, ur Bater
Bremân evit hor mignon qer . (145)

Regetomp ive ouz Doue
M'en recevo en e ascre :
Ha graç deomp oll, yaouatq'ic ha c'os
Da vont euz deiz d'ar Barados .

C'houi, Tauleis, mignonet qer,
Ho po sonch aben pell-anqer
Demeus an dervez horrupl-mâ
Pini a ra deomp oll crena .

- 11 Evidon, (eme an Autrou
 A ziserit din - me ar c'hélou),
 11 Louz ha va c'hamarad blesset,
 11 E c'h ellomp assur lavaret :
- 11 Ma n'ey domp get bet pulluc'het
 11 Gant ar gurun, pa zeo coezet,
 11 E c'h ellomp c'ria a boez penn
 11 E zeo graç d'ar Mestr souveren.
- 11 Eñ em zomettomp a galon
 11 Ha gant eur quier devotion
 11 En peb amzer d'e oll urzou :
 (146) 11 Gloar atao da Vestr an êvou !
- Aboe 'ñ anter a vis qerzu,
 Ne glêver mui eus a bep tñ
 Nemet comz eus a valeurion
 C'hoarvezet gant ar gurunou.
- Ar zeitèc eus ar memes mis,
 Sellaruit, m'ho ped, va brois,
 Eñ Hermitach paros Plourin, (1)
 E fraillas eur vezen sapin.
- Ac'hane 'ned eñ b'èr amzer
 Da dy eur paour q'ez labourer,
 Pehini a voa o repos
 Eñ tal an t'ân, var eur banc - clos.
- Neuz' e c'h antre dre eur prême[ant]
 Eñ cambr an autrou contre - mest ;
 Mes dre vertuz Santez Barba
 N'erruas droug abet gantâ.
- Tostic eno, eur meliner
 A velas o sailla eñ èr
 Nomb' bras tamou eus ar vezen,
 (147) Eñ form glao t'ân, eñ e quichen.
- Da n'os, an nontec d'an ugent,
 Erit r'ei d'èc'h oll da entent,
 Vandro an heur a anter - n'os,
 E zoat oll tranquil o repos.
- Qerqent luhet ha curunou
 A deu da sclaç ar galonou
 Ebars ar quier a Guimperle,
 Entre 'ñ Isol hac an Elle.
- Ar fouldr a goez, hep d'alc pell,
 Var tour caer ilis Sant - Mic'gel,
 Eñ eur difframma eur men bras,
 Pini var euy t'ij a goezas.
- Ar men a dreuzas an t'ij oll,
 Hac a yas neuz d'èñ em goll
 Betec ar gambr an izella,
 Hep na b'essi den na larza.
- Var hed dasu droatat eo chommet
 Ouz eur goele eno placet,
 En pini voa ar vam, an tad,
 (148) Hac eur buquelic cousquet mad.
- Dre c'kraf santez Barba beniquet,
 Nicun n'ey deus bet droug abet.
 Je a zo sur eur merc patant
 Eus he protection buissant.
- Ar gurun, ebars eñ ilis,
 Eñ deus grèt maleurion esqis,
 Ar pez a denn deomp hirvoudou
 Hac a ra deomp seuilla d'aelou.
- Fraillet eñ deus an Anterion,
 Ha draillet an oll dolennou ;
 C'ovessional, qement so
 A voe brisillonet eno.

(1). - Tost da Voutroulez.

176

Goude bea oll distrujet,
Ez eo ractal en em stlapet
Gant calz a furor ha trois bras,
Var abaty c'ôs Santez - Croas.

Er c'horf - ty - ze e zeo lojet
Ar c'hure hac ar Sous - Prefet,
Ar Tribunal, ar Jandarmet,
Mes n'o deves bet droug abet. (149)

Maleur ar vije c'hoarvezet,
Moi ne vije eno placet
Eur discouruner bequet mad,
Hac a deu oll da savetât.

Ilis ha Tour Scaër voe ive
Discaret oll d'an ampent - se ;
Eur gambr a zerrich da ilis :
O va Doue ! pezh tra esqis !

En Brest, var ar goernierez,
Eo coezet ar gurun ivez,
Hac en deves bet grêt, sivoas,
Eur goal distruj ha dommach bras.

Var hed eul leo a Landerne (1)
En Pencran en deves ive
Grêt nombr bras a zestruction :
En eur zonzal e zeus spouron .

Ractal ar gurun pront a ya
Da zistruj Tour Loc - Maria,
Var hed eul leo a Blabennec,
Er memes devez ar zeitec. (150)

Boul beg an tour zo discaret,
Hac ar gariolon distrujet
Hed c'hoec'h troatad a bep coste :
Eur dra estranch voa giclet se .

An tour en em gar soutenet
Vel a ispill hac achantet
Var beg diou goulonen huel
A brênestou an templ santel .

En em strinca 'ra gant arrach
Dioc'h - tu var gambr an horolach ;
Mes ar pezh a rent estonet,
O coez a ne ras trois abet.

Mein diouz an tour a zifframmas,
Hac hed cant troatad o stlapas ;
Bez' o d'oa ouспен mil livr bouez,
Ar pezh a 'ro calz a zoiez .

Eur burzud demeus ar c'haera
Eo Tour ilis Loc - Maria :
Beza en deus a huedet
Cant uquent troatad tremenet. (151)

Mes, selaouit oll, me ho ped,
Eur dra zo estranch bras meurbed ;
En ilis Plabennec a zo
Daou gayer hac en attesto :

En mil seiz cant pemp anter - cant,
Ar zeitec qerzu justamant,
D'ar memes deiz, ar gurunou
A eure nombr a valeurion .

En Loc - Maria, ar c'hloc'h = bras
Hac ar re vian a fraillas ;
An ogrou caer voe bruzunet,
A gouste ouспен tri - vil scoët .

Ar gurun, ractal goude - ze,
A scoas castel Kerangoue,
Castel Penmarc'h a zistrujas ;
Mes selaouit, me ho ped c'hoas .

(1). - En lez Buez Sant Breiz 1837, an A. Miorcec - Kerdanet en deus laqet ar c'houplod - se eus va querez .

(152) Neuz e'za gerqent da zaillet
 Ouz Tourion Pencren, Plovescat,
 Tour Plourvorn, Tour Lanhouarne,
 Tour Treflez a zistruj ive.

Trivac'h bloas ha tri-ugent zo
 Aboe 'n distruch-se en hor brô;
 Hac ar pey zo estonapla,
 Cazi d'ar memes heur e voa.

En em strincomp oll d'ar daoulin
 Ouz treid ar Vajeste divin,
 Da c'houlz diountan pardon,

(Vol. VII, p. 136-152.)
 strophes non numérotées.

Ha lavaromp a greiz calon :

O Jesus-Christ ! Salver ar bed,
 Distroit ouzomp, ni ho ped :
 Selavit hon oll hirvoudou,
 Hac exocit hor pedennou.

C'honni, Santez Barba beniquet,
 Beillit varnomp-ni oll bepret :
 Hon diouiallit ouz maleurion,
 Ha dreist oll ouz ar gurunou.

A. Lédan.